


BM
QUIMPER

DISPUT

ETRE AR MARO

HAC AN DEN YAOUANQ



AR MARO

CETE me êru, va mignon,
Da ober did rentà rêson
Demeus da vue tremenet ;
Scuis eo Doue ouz da velet.

AN DEN YAOUANQ

Autrou Doue, piou eo emàn
A zo deut qen disonj amàn ?
Va speret a zo oll troublet
Gant epouvant eus e glêvet.

AR MARO

Petra lavares, va mignon ?
Lèz da spont, ha cont da rêson,
Ha na vouies-te qet ervad
E teujen abred pe disvezad ?

AN DEN YAOUANQ

Allas ! sivoas, ne vouien qet
E tleac'h donet qen abret ;

Me zònje din, pa voan dispos,
Ne varyjen qen e vijen còs.

AR MARO

Mes alies e poa clêvet
Ne meus biscoas den espernet,
Hac e tleàn an oll falc'hald,
Còs ha yaouanq eus a bep oad.

AN DEN YAOUANQ

Allas ! sivoas, en joa ar bed
E voa va speret ocupet :
Em yaouanqis voa va fianç,
Hac em mignonet va esperanç.

AR MARO

Penos, den sot hac aheurtet,
Ne voas-te get avertisset
Da reformi da voal vue,
Pa ne voas get sur a un de ?

AN DEN YAOUANQ

Allas ! me vel òn faziet ;
Mar plij ganêc'h c'hoas deportet :
Roit din ur blavez termen,
Ma rin qent mervel pinijen.

AR MARO

Penos e fell dide ober
Pinijen en qen bêr amzer ;
Pa ne c'heus grêt betec vrêmàn,
fla te pell amzer zo var ar bed-màn ?

AN DEN YAOUANQ

Me bromet dêc'h, a`dra certain,
E rin prontamant pinijen
Da repara va yaouanqis
Ma roït din termen mis.

AR MARO

Avoalc'h ec'h eus bet a amzer,
Ms carjes ober da zever ;
Mes ne alles pelloc'h appel ;
Eru an heur, ret ê mervel.

AN DEN YAOUANQ

Pa n'en dê qet ho polonte
Va lezel qeit-se en bue,
Ma plij ganêc'h da vianàn,
Un devez c'hoas a c'houlennàn.

AR MARO

Harça ? bremâ paciantet :
Eru an heur, ret ê monet ;
Rac-se-ta, sònj es coall vue ;
Ret ê monet dirac Doue.

AN DEN YAOUANQ

Penos eta, mervel zo ret,
A greiz va nerz ha va yec'het !
Penos quïttât va dossenïou,
Vr joa va cherent, va madou ?

AR MARO

Diveat out bremâ da vouela,
Homân e da eur divea :
E zân da rêi did an tol marvel ;
En heur-mâ e renqes mervel...

AN DEN YAOUANQ

*E c'houlén zicour digant e guerent
ha mignonet*

O va c'herent ha mignonet,
En han' Doue va zicouret ;
Scôet oun gantân d'ar maro :
Deut d'am zicour, hastit afo.

AR GUERENT HAC AR MIGNONET

Evit bremân ne allomp qet,
Beza hon eus affer bresset ;
Pa retornimp, ni a velo,
N'oc'h eus qet a feçon maro.

AR MARO

Güel, den zot ha den aheurtet,
Petra respont da vignonet !
Anzao bremân, den diavis,
Peguer tromplus ê yaouanqis !

AN DEN YAOUANQ

Güir a larit, me zo tromplet
Gant yaouanqis ha mignonet :
Bremân me ro dê mil mallos ;
D'am oll maieur e zint bet eaus.

AN DEN YAOUANQ

*E c'houlen sicour digant Doue hac
ar Verc'hes.*

Me ho suppli, ô va Jesus !
Ha c'houi, Güerc'hes, Mam druezus,
Me ho ped, dre ho madelez,
D'am zicour c'hoas, me, pec'her gez.

AN AUTROU-DOUE

Penos ec'h eus an assuranç
Da c'houlen ouzomp assistanç ?
Bepret out bet hon adversour ;
Petra-ve demp-ni da zicour ?

AN DEN YAOUANQ

*E c'houlen sicour digant ar Zent,
O sent, mignonet da Zoue,
Ho pet truez ous va ene !
Gant ann oll oun abandonet ;
En han' Doue va zicouret.*

AR ZENT.

Penos ec'h eus an hardisson
Da c'houlen hor protection ?
Ne c'heus get miret hor gouellou,
Nac imitet hor vertuziou.

AN DEN YAOUANQ

*E c'houlen sicour digant Æl-mad,
O va Æl-mad ! ô va den qer !*

Var gardien en peb amzer,
M'ho ped va sicourit bremâ
Em necessite diveza.

AN ÆL.

Qement a ellen ameus grêt
Bete vremàn en da andret ;
Poent e zeo din d'abandoni
Pa ne c'heus qet sentet ouzin.

AN DEN YAOUANQ

Me vel ervad ê tremenet
Va amzer da veza sicouret ,
Bebet e meus en libertin,
Doue a rent justiç erfin.

Em maro en diles Doue,
Pa'm boa'n dilezet em bue ;
Resistet meus d'e oll graçon,
Hac em refus em goulennou.

AN DEN YAOUANQ

E qüittât e guerent hac e vignonet.

Dilezet oun en abandon ;
N'en deus mui evidòn pardon.
Adieu, qerent ha mignonet,
Adieu, bed fall ha milliguet.

AN DEN YAOUANQ

E qüittat joaüstet ar bed-màn
Adieu, grandeur ha bombançou ,


Enoriou vèn ha triomphour ;
Adieu d'an traou eus an douar ;
Adieu d'ann eê, adieu d'e c'hloar.

Mallos d'ar vam, mallos d'an tad
A zo bet ouzin qen ingrat,
M'o deus grêt din coll va ene,
D'am beza lezet em liberte.

E zàn da veza entêret
En ifern gant an dud daonet,
Da lesqi ebars ar flammou,
Da james gant an diaoulou.

Ha possubl ve, ô va Doue,
E serfec'h ouzomp dôr an eê !
Obtenit demp, ô va Zalver ?
Eur plac en ho cloar eternal.

FIN.



RECIT

*Composet a nevez var sujet eun exempl
êruet gant tri maleürus*



Var ton an Uzullier.

BRETONNET, me ho suppli, tostaït da
Bglêvet.

Eur recit eus eun exempl a neve êruet
Gant tri maleürus impi, cruelha dirêson

En em roet d'an diaoul eus agreiz
o c'halon.

Er bloa mil eiz cant ugent, er
guær eus a Boulen.

Evit rêt sclêr da entent dirac ar gris-
tenien,

Qement den am selaouo hac a zo
badeet,

Oc'h ober reflexion a vezo estonet.

En eizvet deiz varnugent demeus a
vis güenver.

En deveziou molarje evit explica sclêr.
E voa an tri maleürus en eun hostaliri
Eus al liqueuriou güella ouz en em
zervichi,

Ha pa voe leun o c'horfoa, o devez
concluet

Etreze qemer mascou evit mont da
redet ;

Daou anê o deus laqet var o c'heinou
crec'hen,

Da c'holo o habijou, ha qerniel var
o fen.

An drivet eus aneze è ar maleür-
ussa :

Pa voa e gamaradet o vonet digantâ.
E sonjâs mont d'ar garnel, hac en de-
veus fourret

E benn en eur penn maro ; eüzus voa
da velet,

En toullou e zaoulagad ec'h alum
flamboezou

Evit monet da redec partout dre ar
ruyou ;

Ar vugale a zaille partout a roc deàn.

Nemet an dud resonabl dec'he dirazàn.

Ober a rejont o zro hep en em rancontri,

Var eur c'horn demeure a guêr eu em
gavjont o zri,

Hac eno o deus galvet ar zent hac an æle,

Hac hor zalver biniguet darenta brezeldè

Dre ar boez eus al langach o deveus
prononcet

A enep hor Mestr divin hac hor Mam
biniguet,

E scòas un tarz curun aziouc'h dè qer
ponner,

Qen a ra eur grenaden an oll ties e qêr.

Sponronet eo calonou an oll habitantet

O sònjal e voa êru ar fin demeure ar bed;

Penevert m'odeus clêvet an declaration

E voant prest da berissa en spont hac
en eston.

Distrêi a ra'r maleurus da zigas d'ar
ganel

Ar penn maro voa gantin d'e blaç, an
den cruel !

Hac e tuas d'e bedi, o trei e guein dezàn

Dont an deiz varlec'h d'e di evit coa-
nia gantàn.

Ac'hane e teu d'ar guær da guemeret
repos,

Hac e za en e vele ar rest demeus an nos
Mes ne alle qet cousqet gant an anaon
mat,

E voa gantàn tourmantet o tonet d'e
biqat.

Hep beza disclêryet da nicun eus
e dy

E fury e hardisson hac e iffronteri.

E zas gante assambles d'ar parc da
labourat,

N'ell qet reposit, pa sonj en e grim
détestabl.

D'an nôs pa voa a zeet gant e dud diouz
an dol,

Ec'h êru ar penn maro da darc'hat var
an nor,

Hac ou àn, ar relegou dre buissanç Doue
Pere voa ous en douguen entre m'oa
en bue.

An ini a zo savet da zigueri dezàn,
Ouz er güelet oc'h antren, a deuas da
gouezàn ;

Cregui ra an dud ennàn en avis e zével,
Qement e voa spouronet, m'en deus
renqet mervel !

Avanç a ra an Anaon, hac en deus
lavaret :

Chomit, va zud, da goania, ne genit
den ebet :
Ouzit e ràn va c'hombat, va c'homper
maleurus,
Va güelet a res bremâ en eur stad perillus
Petra e teus gonezet evit va zourmanti?
Elec'h pedi evidòn, e cresques va anui :
Goulen pardon ous Doue eus da goal
bec'hejou ;
Meritet ec'h eus beza dispennet a beziou
Ar muia tra am glac'har, nonobstant
d'am oll boan,
Eo argalonad o do hada dad hada vam,
Ovelet o deus maguet urbuguel libertin!
Ha güelet en difframa, ô Doue,
pebes fin !
Daou zeves goude ma voa an exempl
êruet,
E varv e dad hac e vam gant glac'har
sezisset.
Cetu maro pêvar den demeus armemes
ti ;
Pedomp Doue evito hac ar Verc'hes Vari.
Ar den m'ân a voa oajeta bemp bloas
varnuguent,
Ho pedi ràn tud yaouanq, da guemeret
exempl
Da bellât diouz an danger ha goal
compagnunéz,

A zo cos da vil maleur ha mil fallagries.
Pa glêo e zaon gamarad peseurt pu-
nition
En eus bet ar maleurus goude e hardison
E quittaont o moyen, ha mont er mes
o brô.
Evit obert pinijen ar rest eus o deizou.
Ha c'houit, tadou ha mamou o deveus
bugale,
Corrijt hac instruit, habet soign anezo
Rac m'ar mançit varneze, abrei pe di-
vezat.
E rint dezo o-unan ha dêc'h goal ga-
lonad.
Coulennomp digant Doue hac hor
mam ar Verc'hez.
Hon loder barados goude ar fin horbuez
Da renta meleudiou d'hor Zalver beni-
guet
Epad an eternite bars en e eürusdet.

FIN



E Montroulez, eus a impr. P. LANOË.